

**18 - Avant deux de travers : Dañsit merc'hed (Traditionnel)**

Le texte a été trouvé par Christian RIVOALEN à la Bibliothèque de Morlaix. Il a été utilisé sur un air de bal de la suite Treger, pendant le stage de Dañs Treger en 2009. Ce texte a été adapté sur un air d'en avant-deux par Maurice BOUGUENNEC et le Trio KSL.



## DAÑSIT MERC'HED

## Dansez, les filles

Biskoazh ne c'hoarzhis kemend-all, gant Marivonig, gant Marivonig	<i>Je n'ai jamais autant ri, avec Maryvonne, avec Maryvonne</i>
Biskoazh ne c'hoarzhis kemend-all evel e Pontekroaz an deiz-all	<i>Je n'ai jamais autant ri qu'à Pont-Croix l'autre jour</i>
Dañsit, merc'hed, ha grit ar bal, ha ni a zañso, ha ni a lammo	<i>Dansez, les filles, et faites le bal, et nous, nous danserons, et nous sauterons</i>
Dañsit, merc'hed, ha grit ar bal, laoskit ar c'hure da hopal	<i>Dansez, les filles, et faites le bal, laissez le vicair crier</i>
O welet goude ar sermon, gant Marivonig, gant Marivonig	<i>En voyant après le sermon, avec Maryvonne, avec Maryvonne</i>
O welet goude ar sermon ar biniou gant ar person	<i>En voyant après le sermon le biniou avec le curé</i>
N'em eus ket gallet refuziñ da Varivonig, da Varivonig	<i>Je n'ai pas pu refuser à Maryvonne, à Maryvonne</i>
N'em eus ket gallet refuziñ, merc'hed a zo deut d'am fedañ	<i>Je n'ai pas pu refuser, des filles sont venues me prir</i>
Da gompoziñ ur gavotenn gant Marivonig, gant Marivonig	<i>De composer une gavotte, avec Maryvonne, avec Maryvonne</i>
Da gompoziñ ur gavotenn evit ma hejint o lostenn	<i>De composer une gavotte pour qu'elles secouent leurs jupes</i>
En desped da gement a zo, o Marivonig, o Marivonig	<i>En dépit de tout, oh Maryvonne, oh Maryvonne</i>
En desped da gement a zo, dañs a zo bet ha dañs a vo	<i>En dépit de tout, on a dansé et on dansera</i>
lñjust ha kriz e vefe difenn, o Marivonig, o Marivonig	<i>Il serait injuste et cruel, oh Maryvonne, oh Maryvonne</i>
lñjust ha kriz e vefe difenn d'an dud yaouank bezañ laouen	<i>Il serait injuste et cruel d'interdire aux jeunes gens d'être heureux</i>

Me a oar ervat petra a zo kaoz, gant Marivonig,  
gant Marivonig  
Me a oar ervat petra a zo kaoz eo grignous  
atav ar re gozh

Gallout a raent, mes ne c'hallont mui, gant  
Marivonig, gant Marivonig  
Gallout a raent, mes ne c'hallont mui dañsal ha  
lammat koulz ha ni

Pa vezoc'h skuizh o labourat, gant Marivonig,  
gant Marivonig  
Pa vezoc'h skuizh o labourat, deuit da  
ziskuizhañ d'an ebat

N'eus netra koulz hag an dra-se, gant  
Marivonig, gant Marivonig  
N'eus netra koulz hag an dra-se, gwelloc'h eo  
kousket goude-se

*Moi, je sais bien pour quelle raison, avec  
Maryvonne, avec Maryvonne  
Moi, je sais bien pour quelle raison les vieux sont  
toujours grognons*

*Ils pouvaient, mais ils ne peuvent plus, avec  
Maryvonne, avec Maryvonne  
Ils pouvaient, mais ils ne peuvent plus danser et  
sauter comme nous*

*Quand vous serez fatigués de travailler, avec  
Maryvonne, avec Maryvonne  
Quand vous serez fatigués de travailler, venez-  
vous reposer et prendre du plaisir*

*Il n'y a rien de tel que ça, avec Maryvonne, avec  
Maryvonne  
Il n'y a rien de tel que ça, on dort mieux après ça*

